

(411)

Guerez
Ar Franç delivret.

Var an ton gallec: Malgré toute la tendresse.

Gant ar glao ha gant an avel
An ed a zo bet pleget;
E velet a rër o sevel,
Gerqent ha ma ve calmec.
Savit ho penn, quir Francisien,
Rantit graou da Roue;
Hirio 'leger ar gurunen
Var bez sacr ho quir Roue.

Anconahit oc'h anqen,
Ha dizontit ho clac'har,
Ne moc'h mui dindan al lezen
Eus oc'h 'mpalaer barbar.
Napoleon zo discaret,
Ranget en deus col d'e dro;
(412) Re bel, siouas! en deus rënet
Varnomp-ni ha var hor bro.

A ma voa galloudussa
E coezet dindan e vlam:
Pa verzer savet huella
Neurze vez ar goassa lam.
Tro-var-dro an ol Rouanes
A sponte dirac e faç,
Hirio, leuz a dristidigez,
En eo a reuz goulen graç.

Mil ha mil [ben]nos d'ar Lozon,
Ha d'ar Russi qement al,
Rac d'an tirant Napoleon
O deus bet roet e fal.

Casset eo da euz enezen,
Pel bras e creis ar mor don:
Graç deñ d'ober pinijen
Evit obteni pardon.

(413) Gê quit eta, Napoleon,
Doue en e brovidanç
En deus soufret e lezennou
D'or goassa ebars en Franç.
Dre hor c'krimou, dre hor pec'het,
On eus meritet, allas!
Hon Roue or boa dibennet,
Hac hon Rouanez, siouas!

Tud Franç, hanval ois tud payen,
A zilezas o C'hrouer,
A chasseas e vëleyen,
A zistrujas e Oter.
Ha dre eur quir bunicion,
Caer on eus bet hirvoudi
Robespier ha Napoleon
On eus ranget anduri.

(414) Goude ugent vloas maleurion,
Doue, en e drugare,
A deu da zec'ha hon daolon,
O rentä deomp hon Roue.
Breur da Louis ar C'hoerqevet,
Mab bian da Sant-Louis,
Dre a vertuz hac e speret
Ar c'henta den e Paris.

244

Ha ma teufe c'hoas, dre valeur,
 Tud anvuus da zével,
 Ha da glask troubli hor bonheur,
 Ni a rêy dezgo tevel.
 Rac ni zo tout prest da zifen
 Coz hon Roue hac hor tad,
 Ha da rêy, evit e zoutem,
 Hor buerz a galon vad.

Bretonet! a greis hor c'halon
 Suphomp Gouer ar bed
 Da rêy e venedicision
 D'on Roue muia caret;
 Eur vuez hir hac evvuus;
 Evit ma elfomp gant joa,
 Gant eur peoc'h douç, ha padus,
 C'rial tout vive la Roa!.....

(415)

M. Guesbriand.
 1814.

(Vol. II, p. 411-415)
 9 str. numérotées.